

Marion Alexandre (Zantig) Plouleh 1881 – Runan 1901). Beleg.

Ar vuoh koz hag ar paotr-saout

Eur vuoh koz trubuillet
D'ar paotr-saout eun devez a gonte he glahar :
« 'Vidon, emezi, war an douar
Ne vo 'ta ken plijdur 'bed ?
Gwechall me 'pa seder 'vel na oe ket unan ;
Bemdez d'ar prad 'vezen kaset,

Hag a-wechou, zoken, 'vid espern din ar boan
'Barz ma hraou veze laket
Behiou yeot fresk deuz an dibab.
Diwin¹ kammed den ne ree goap.

Al lêzerez, dreist-oll, 'deue liez d'am gweled,
Me 'oa he buoh muiañ-karet !

Mez 'baoe eur pennad 'zo, diwin ne zeller ken
Hag eur wech an amzer hepken
'Vez roet din eun tamm foenn fall,
Ha, koulskoude, den n'hall lared
Penaoz n'am-eus ket servijet,
Deuz ma gwellañ, ma mestr gwechall :
Hep klemm, bepred am-eus sentet ;
Nao pe deg leue 'm-eus douget ;
Ha dre ma lêz ouspenn eur skoed
En e hodell a zo bet kouezet :

Perag, 'ta, evidon bremañ e ve ken kri' ?
« Perag, 'me ar paotr-saout, n'eo ket diêz hen goud :
Dispriza 'reer ahanout 'balamour d'az kozni
N'haller ken, ma buoh kêz, goro ahnaout ! »

Gand hemañ 'oa ar wirionez,
Hag e respont 'lar dim diwall,
Dreist-oll, deuz ar vignoned fall
A gavom war on hent bemdez !
Keit ha ma rofet deze sikour
E klevfet gante komzou flour :
Mez adaleg na hallfet ken
O zerviji dimeuz o hoant,
Neuze avad ne gavfet den ;
Laosked 'rint ahanoh hoh-unan !

¹ Diwin : Diouzon.